

Aliou eur vamm d'he bugale

War don : Santez Mari, Mamm Doue

I

Klevit amañ,bugalez¹²,
Klevit eun ali mad :
Roit din ho karantez
Honnez eo ho tlead ;
Rag Doue a hourhemenn...
Na vezit ket digar...
Anez n'ho-pezo biken
Eurvad war an douar !...

Diskan

Mamm vad, sehit ho taelou
Ha bezit laouen c'hoaz,
Rag ho kwir vugaligou
Ho karas a-viskoaz !...

2

Eur vamm a ro d'he bugel
Lêz he bronn d'hen maga ;
Gwelloh 've ganti mervel
Ha dilezel pep tra
Kent evid gweled he mab
Re bell en dienez ;
Euz an oll draou an dibab
A vezo da hennez.

3

Gantañ bepred trubuillet
En noz ne gousk takenn ;
Kerkent ha m'he-deus klevet
Gantañ eur griadenn,
E telamm euz he gwele
Evid hen luskella,
Ha dezañ e ro goude
Eur banne da eva !

4

N'e' ket a-walh hen maga,
Deski komz a raio ;
Lavared : *Mamm* ha *tata* ;
Breton mad e vezo ;
Galvet eo ar hemener
D'hen gwiska penn-da-benn :
Bragou braz, chupenn vezer,
Eur pennad bleo melen !...

¹ bugalez : liester "bugel".

5

Ha goude kemend a boan,
 Bremañ, p'eo eun den kaer,
 Gand ar roue, a glevan,
 D'ar brezel hen galver...
 Torret en-deus kalz pennou,
 Desket en-deus galleg...
 Allaz ! Doue, ma Aotrou !
 Ne oar mui breozneg !...

6

Ma flanedenn 'zo kaled ;
 Setu petra 'hoarve' :
 Bugalez em-eus ganet
 Ha n'on ket evite ;
 Bremañ e komzont galleg,
 Eur yez ken dizano !...
 Ha me a gomz brezoneg...
 Tud digar, it en-dro...

7

Me 'zo evel eur goz yar
 O sevel houidi ;
 Pa gerzont war an douar :
 Ez int yer, emezi ;
 Hogen pa'z eont en dour
 Ar vamm baour 'zo spontet ;
 Kemerit da vezelour
 Ar pezh em-eus laret.

8

Karit ervad Breiz-Izel
 Hennez eo ma ano,
 Ha mirit bete mervel
 Yez koz Barzed ho pro,
 Enorit neb ho magas,
 Ho mamm ez eo bepred ;
 Doue hen gourhemennas
 Ha n'ho tilezo ket !...

Diskan diweza

Mamm vad, sehat ho taelou,
 Na vezit mui mezeg :
 Bremañ ho pugaligou
 A gomzo brezoneg.

Gwengamp, miz Eost 1869.
J.-M. Ar Yann.